

AN AMZER

GWENER 1 C'HWEVRER 1980

NIVERENN 9 4 FAJENN 2 LUR
2vet bloavezh Bep Gwener

Mererezh, Skridaozerezh:
2 straed ar Richardiere
35100 ROAZHON

PORZH S' MALO E 1979

Daoust d'an enkadenn armerzhel, porzh Sant-Malo en deus kresket e eskemmoù marc'hadour-
ezh a 33% e 1979.

Dezouget ez eus bet ouzhpenn 2 vilion a donennadoù etre an enporzhiañ hag an ezporzhiañ. Ar pep pouezusañ eo ar fosfat, ar c'hoad, ar maerl, ar greunvaen, an tireoul, h.a.

Gant al linenn B.A.I. (kompagnunezh Alexis Gourvenneg), diazezet pemp bloaz a zo, ez eo deuet Sant-Malo da vezañ ur porzh beajourien.

827.000 a dreizhourien a zo bet o vont da Vreizh-Veur ha da Jerzenezh.

Terkadurioù a chom da seveniñ evit degemer al listri bras: astenn ar skluz evit resev listri a 180m hirder hag adaozañ ar poull-kreiz evit kaout kaeoù azas ouzh al listri-se.

Ouzhpenn, gortoz a reer atav ar gourhent etre Sant-Malo ha Roazhon.

L.B.

N'hon eus ket lec'h a-walc'h evit lakaat "Kemennoù" ha "Kel-
aouennoù" ar wech-mañ. Hon digarezit. AN AMZER.

ur banniel nevez

Da geñver donedigezh ar sirk Zavatta e Roazhon, ez eus bet graet kalz bruderezh un tamm e pep lec'h. Ar ger-stur a oa (e galleg): "Achille Zavatta, sirk ar Vretoned". E-kichen ar frazen-mañ e weled ur gwenn-hadu. Steuziet avat an erminoù e-barzh ur gelaouenn, lakaet en o lec'h bleunioù lili. Gwelout bleunioù lili war ur gwenn-hadu! Peadra da ruziañ evit an treser.

BREIZH HAG AFGHANISTAN

Petra a c'hoarvez er vro-hont, e-kreiz Azia, hag a 'm broud da geñveriañ ar stad en Afghanistan ouzh un darvoud kozh en istor Breizh.

Bez ez eus 90% a dud eno na ouzont na lenn, na skrivañ, hag a zo, diwar gement-mañ, dalc'het en diouiziegezh ar vrasañ. Ur re bennak dorn-ouzh-dorn gant kenvroidi all, hag o deus tizhet pakañ deskamant a drugarez da renk o zud er gevredigezh, a anavez enta stad ar vro, hag e fell dezho en abeg da-se kemman anezhi. An dud-se a sav bremañ da stourm a-enep da c'hladdalc'helezh, damsklavezh ha mac'homerezh.

Hogen, ur renadur berr ha mac'hus gant kenwallerezh an impalaerelezh a roas tu hag amzer d'ar c'hladdalc'herion kregiñ gant an enepstourm. Skoazellet ez int eveljust gant galloudoù estren a vez atav oc'h ober fae war an dud, e kement lec'h ma renont.

O vezañ ma 'z eo an darn vrasañ eus ar c'hladdalcherion, koulz lavaret, tud a "iliz" ivez, ha ma klaskont lakaat da badout o aotrouniezh dre ar C'horan hag ar sabrenn, n'eo ket souezhus 'ta e flastront bremañ bremañ adreizhadurioù an nerzhioù-araokaat evel pa ne vijent nemet diaoulerezhioù, oberioù an diaoul: doueel, hervez a lavaront, e vije ar frammadurioù gladdalc'hek; an hini a glaskfe distroadañ anezho a dagfe evel-se an Urzh vat, Urzh Doue, dlead santelañ an holl fideled eo kemer ar binvioù-brezel evit peurzistrujañ an dizoueidi!

Setu ar pezh a c'hoarvez siwazh bep tro ma kej an digelenn hag ar mac'homerezh. Kemend-all a welomp er bed

kozh alies.

Met n'em eus ket respontet c'hoazh da 'm goulenn kentañ. E Breizh ivez e c'hoarvezas kement-se e-pad bloavezhioù kentañ an dispac'h gall, pa glaskas an nerzhioù-araokaat er mare-hont sevel un urzh reisoc'h war rivinoù ar renadur kozh; kevreañ a reas ar veleien hag an aotrouien ivez evit stourm a-enep d'an Nevezadur gant harp ar Stadoù warlerc'hiusañ.

Hiziv, evel 200 bloaz 'zo, an hevelep Chouanerezh.

G.C.

Kan ar Bobl 80

An 8vet "KAN AR BOBL" a vo hevlene d'ar 5 ha d'ar 6 a viz Ebrel (dibenn-sizhun Fask) en Oriant evel boaz. A bep seurt rummadoù a vo klevet, hag e vo 8 rakkenstrivadeg. Ne venegomp ket ar rummadoù dibabet evit pep rakkenstrivadeg (n'eo ket atav an hevelep re), met posubl eo goulenn roll pep rakkenstrivadeg digant an den karget anezhi. Evit enskrivañ eo dav ivez goulenn outañ.

Rakkenstrivadegoù a vezo:

•10 C'hwevrer
NORZH (44390) Titouroù hag enskrivadur: Ao Graveleau, La Solitude, hent Isse, 44390 Norzh
GWINEVEZ-LOKRIST (29235) T&E
F. Gueguen, Lann ar vourc'h, Lannouarne, 29235 Gwinevez, PG: 61.60.46.

•17 C'hwevrer
MAEL-KARAEZ (22340) T.&E.:
Ao Y. Robin, Lannellen, 22110 Rostren. PG: 29.08.86.

SANT-ERWAN-BUBRI (56310) T&E:
Ao L. Bevon 56310 St Erwan-Bubri. PG: 51.72.06.

FONT-AN-ABAD (29120) T. & E:
(Kendalc'h pajenn 2)

MONT D'AR C'HOARIOÙ?

Disrannet eo ar gouarnamant-où -hag an dud- evit gouzout hag eñ e tle ar sportourien mont d'ar C'hoarioù olimpek e Moskva. Darn a lavar ne c'heller ket meskañ ar politikerezh hag ar sportoù. Neptu e oa ar C'hoarioù e spered Pierre de Coubertin, aozet bep pevar bloaz en ur vro, n'eus forzh pe hini. Lod all a lavar eo deuet da vezañ politikel ar C'hoarioù a zeu, a c'hellfe servijout d'an aozerien evit skignañ o menozioù, gant kement a dud dirak o skinwel d'ar mare-se! Tud 'zo o deus soñj eus c'hoarioù 1936 en Alamagn...

Diskoulmañ ar gudenn-mañ a zo er-maez eus pep kannadouriezh, ur gudenn a brederouriezh ne lavaran ket. Hag amañ ne

c'heller ket komz evit ar re all, evidomp hon-unan hepken. Evit ar gouarnamantoù, an dibab a vo graet ganto a vo pouezus evit o brud. Hag ar sportourien? Int eo a zle dibab hag eñ e fell dezho mont d'ar C'hoarioù, pe chom er gêr, pe c'hoazh mont da Moskva en ur ober ur seurt harz-labour. Pep hini anezho a zo barrek a-walc'h da brederiañ ha lavarout peseurt diskoulm en deus dibabet, ha ket ar pennoù-stad. An arc'hant a chom avat etre ar preder hag an dibab, evit ar stadoù koulz hag evit ar sportourien.

Ur gouzañvad nevez eus ar genreizhiad a-vremañ eo ar C'hoarioù olimpek.

Mark SEURIALL.

BERR-HA-BERR

— Ur vanifestadeg a zo bet en Ajaccio gant sindikadoù 'zo ha strolladoù an tu kleiz, evit difenn prizonidi gKorsika ha goulenn ma vefe echuet gant ar c'henboliserien.

— Dilennet eo bet an Ao Bani Sadr da brezidant Iran. Koulskoude, o vezañ ma ne oar ket kalz Iraniz skrivañ, diaes eo degemer an dibab-mañ evel hini an darn vrasañ. E kalzig a vurevioù eo bet gwelet adskriverien o verkañ un anv disheñvel diouzh an hini dibabet gant ar mouezhier.

— Ne vo ket kreizennoù nukleel (derc'hanel) e Danmark. Divizet eo bet gant gouarnamant Keubenhaven, a oa a-du betek-hen evit lakaat kreizennoù a-strew er vro.

— Trubuilhoù e kreisteiz Tunizia. War-dro 300 soudard deuet eus Algeria pe Libia o deus arsailhet Gafsa, ur gêr 300 km diouzh Tunis. Harzet int bet gant lu ar vro, met ar freuzoù a zo bras.

— Aet eo an Ao Giscard d'Estaing d'ober ur veaj a-berzh-Stad (ofisiel) en Indez. En diskleriadur a zo bet embannet goude an emweladennoù, e c'heller lenn ur c'halvadenn d'ar broioù brasañ da skañvaat an diaesterioù a harz sevel darempredoù kenetrezo.

Kan ar Bobl 80

(Kendalc'h ar bajenn 1)
Ao Conry, animatour kêr bPont-an-Abad, maerdi, 29120 Pônt-an-Abad. PG:87.24.44 .

• 22 Meurzh
PLEVAEL (22210) T&E:A.E.P.: 22210 PLEVAEL. PG:(beure)28.69. 56,(abardaez)28.61.68 .

TREGASTELL (22730) T&E: Dim. Le Guillouzer, 2 str ar seizh enezenn, 22730 Tregastell. PG 28.88.20 .

• Bro-bPariz. Titouroù & ensk.: Mle Leguen, 13 rue Charles de Foucauld, 78300 POISSY. PG:320. 84.60 .

Rummadoù 'zo, evel kenstriv - adeg delenn, "Celtavision", h.a. Evito. Evit enskrivañ d'ar rese hag evit kaout titouroù diwar o fenn: kengor-meur gouelioù An Oriant, maerdi, 56100 AN ORIENT PG:21.20.51 .

GOUEL AR BREZHONEG
e **PLABENNEG**
14-18 MAE 1980

14 C'HWEVRER 1980

gala evit

DIWAN

Sal al Lisoù

ROAZHON

8e00 noz

GERIADUR BRAS



fransez vallée



adembannadur

da rakprenañ

Reizh: 120 lur

Keinett 160 lur

Kein ler 290 lur



KEVREDIGEZH VREIZHAT A SEVENADUREZH
22 KAE DUGUAY-TROUIN 35000 ROAZHON

BRO ROAZHON UR SIZHUNVEZH E BREIZH

— A-benn nebeut e vo aozet e Roazhon e "Kleub ar c'helaou-ennou" un abadenn diwar-benn Roparz Hemon, evit embannadur e oberenn c'hoariva (en he fezh) gant Al Liamm (C'hoariva I & C'hoariva II).

— Diriaou 24 a viz Genver en em gave maodiern ar Barnerezh, Alain Peyrefitte, e Roazhon. Kroget en doa 18 miz 'zo d'ober tro holl lezioù-engalv Bro-C'hall, hag ouzhpenn-se e oa diriaou e Roazhon kadoridigezh Prokolor-meur Lez-engalv Roazhon, an Ao Jean Mazoyer. E-doug ul lid aozet war an ton bras en deus ar maodiern graet e brezegenn, e-lec'h en deus pouezet war ar gudenn, e oa kresket niver ar barnedigezhioù ha ne oa ket kresket a-walc'h, nag an arc'hant, nag ar savadurioù. Marteze e vo roet muioc'h a arc'hant gant ar Stad. Komzet en deus ivez war ar c'hondaonidigezhioù ha war an toull-bac'hioù. Evit lez-varn surentez ar Stad en deus diskleriet ne vefe ket posubl he c'hemmañ en ur sezvarn keit ha ma vo posubl gwaskañ war ar strollad-barn.

Erwan GENEL (kensk. Bro-Roazhon)

— E C'hoariva ar Barcherezh, adalek an 28 Genver betek an 8 C'hwevrer, e vo "Lazarillo" (krouidigezh etrevroadel) gant ar bagad "C'hoariva an Alibi" (Roazhon). 28 straed ar Barcherezh, 35100 ROAZHON PG(99)99. 47.63 .

— Kuzul kêr Roazhon a baeo mizoù ur skol vrezhoneg en ur skolaj eus Roazhon, dre ma oa bet nac'het gant tud ar Stad daoust ma oa goulennet gant 70 den.

BRO B PONDİ

— E Breizh (4 departamant siwazh) ez eus ur "c'hevredad echedoù" (gwezboell) a zo edan K.G.E. (Kevredad Gall an Echedoù/Gwezboell), a zo edan met ket bepred: e miz Gwengolo 79, ez eus bet aozet e Brest un "tournamant gwezboellourion vihan Europa (minimes)", hag eno e oa ur skipailh a vro-C'hall hag ur skipailh a

Vreizh. E miz Mae e vo aozet ur match etre Breizh hag an inizi Saoz-ha-Norman.

Daou gelc'h nevez a zo bet krouet er bloaz-mañ e Bro-Wened: unan e Pondi hag unan e Baod (Alan Cadiou a ra war-dro an dra-se e Baod; Pellgomz:51.10.37).

Bep bloaz e vez kelc'hioù Breizh o c'hoari kenetrezo (etregelc'hiadoù). Ouzhpenn-se e vez aozet ivez ur "gevezadeg hiniennel Breizh" (Championnat indiv. de B.). Er bloaz-mañ e vezo e Lesneven e dibenn miz Mae (e-pad dibenn-sizhun ar Sul Gwenn).

A.D. (kensk. broioù Gwened ha Pondi)

— Disadorn 26 e oa bodet e Pondi Kuzul ar Brezhoneg (kadoriad: Per Denez), aozadur o vodañ war-dro 15 strollad ha kelaouenn, difenn ar brezhoneg o fal: Al Liamm, Skol Ober, Wanig & Wenig, K.E.A.V., Emglev an Tiegezhioù, Kristenion Breizh, Skrid, Imbourc'h, Skol, Hor Yezh ... E-pad 4 eurvezh labour ez eus bet komzet eus kalz a draoù a-zivout K.A.B. hag an Emsav dre-vras. Met ne c'hellomp menegiñ nemet un nebeut poentoù: komzet ez eus bet kalz eus "Al Liamm" en deus kresket kalz, er bloaz-mañ, e embannadurioù (8 levr, 1.200 paj.), bennozh da garta sevenadurel Breizh; eus Skol Ober (1.000 skoliad). Kaset ez eus bet lizheroù divyezhek, da gannad Bro-Rusia e Bro-C'hall evit enebiñ ouzh harluadenn Sakharov; da rener ar pellgomzerezh evit goulenn ma vefe skrivet "pellgomz" war al lochennoù pellgomz (K.A.B. a zo o vont da embann 500 sk. eus ar pegsun-mañ); d'an Ao Condamine, rener FR3 Breizh, evit ma vefe dereatoc'h plas ar brezhoneg er skinwel, er skingomz; d'an Ao Coppitern, kannad Europa (Volksunie), peogwir en deus komzet a-du gant ar minorelezhioù gwasket e Bro-Chall.

Diskleriet en deus K.A.B. e oa a-du gant ar vanifestadeg aozet gant an Talbenn Sevenadurel Araokour e Montroulez (ne vez ket desket brezhoneg en ur

AN AMZER

2 straed ar Richardiere
35100 ROAZHON

Kelaouenn sizhuniek
CPPP 62319

Rener ar gelaouenn:
Mark DECAMBOURG

KOUAMANANTOU:

3 MIZ (12 niverenn):

Reizh: 18 lur
Studieren, skolidi: 12 lur
Skoazell: 20 lur

6 MIZ (24 niverenn):

Reizh: 36 lur
Studieren, skolidi: 24 lur
Skoazell: 40 lur

12 MIZ (48 niverenn):

Reizh: 72 lur
Studieren, skolidi: 48 lur
Skoazell: 80 lur

KRP (Decambourg): 25.97V Roazhon

Moulet ez eus bet 500 sk.
ag an niverenn-mañ

skolaj pa vez goulennet gant ar gerent). Dilennet eo bet Per Denez da gannad K.A.B. e Kuzul Sevenadurel Breizh (K.A.B. en deus ur c'hannad hepken eno hag e vo c'hoazh klemmet evit-se).

H. deCambourg (KAB/Pondi)

BRO gKEMPER

— Kreizenn derc'hanel Plogo a lak adarre trouz da sevel: dileuridi sokialour Penn-ar-Bed o deus komzet a-du gant maered kanton Plogo, a-enep savidigezh ar greizenn hag a-enep an enklask foran.

KLASK A REOMP C'HOAZH
KENSKRIVERIEN EVIT PEP BRO
(BROIOU AR C.E.L.I.B.)

• Kendalc'h Etrekeltiek 1980 a vezo adalek an 28 a viz Gouere betek an 2 a viz Eost 1980 e St Patrick's Training College, Drumcondra, Baile Atha Cliath (Dulenn).

• Pred Al Liamm evit an 200vet niverenn a vezo d'an 29 a viz Here. N'eo ket bet c'hoazh divizet al lec'h, met marteze Roazhon pe Dinan.

KERNEV-VEUR: DASORC'HIDIGEZH UR VROAD.



Gouzout a rit, moarvat, ez eo ar c'herneveg ar yezh a zo an tostañ ouzh ar brezhoneg. Gouzout a rit ivez o deus bet strivet tud evel Henry JENNER, Morton NANCE, A.S.D. SMITH, evit ober ur yezh vodern eus ar c'herneveg.

Ha setu aze e chomo sac'het ar Vretoned. Petra c'hoarvez en deiz-a-hiziv e Kernev-Veur? Difoutre kaer ar Vrezhonegerien!

Fentus eo gwelout penaos ez eus gizioù e Breizh evit mont war hent ar geltelezh sakr! Ar Vreizhiz na ouzont ket o yezh a zibabo alies mont da Iwerzhon. Brav ar vro ha mat ar guinness! Ha saozneg (gant liv ar vro, met saozneg memestra) gant an dud, ar pezh a aesa kalz an darempredoù. Ar Vreizhiz a zo evit brezhonegañ, int, a gavo gwelloc'h mont da Gembre. Eno e vezer degemeret mat, n'eo ket displijus blaz ar "cwrw chrwerw" (bier c'hwerv), ha plijadur ivez n'eus forzh pegement o trailhañ kembraeg en Eistezvod gant hon "c'hendirvi".

Kernev-Veur? Ur vro zister, a soñj ar Breizhad keitat. Kernev-Veur, bro an drouized, mod-kozh, ar geltiegourien strizh o spered.

Na pegen diwir eo deuet da vezañ seurt menoziou! Kernev-Veur: na kenteliusat bro evit ur brezhoneger!

Levrioù 'vefe da skrivañ war an doare m'o deus un nebeut Kerneviz pennek lakaet o yezh da vezañ ur benveg azas ouzh an ugentvet kantved. Lavaromp hepken ez eo evito holl, sichenn o broadelezh hag an arm gwellañ evit chom hep bezañ lonket er South-West saoz.

Abae ur pemp bloaz bennak ez a kalz buanoc'h war-raok ar c'herneveg ha se n'eo bet merzet gant nep den e Breizh koulz lavarout.

Pet den a zo bremañ barrek da gaozeal kerneveg? Sifroù a bep seurt a vez roet. Ar pezh a zo sur eo ez eus miliadoù a

dud o teskiñ. Neuze, 200 den? Pe 12? Diaes gouzout. En ur pennad diwar ar c'herneveg en "Y Cymro" (kelaouenn sizhuniek hollgembraek) e lavare Tim SAUNDERS, ur mailh war ar c'herneveg, e c'hoarvez er mare-mañ un dra bouezus-kenañ: n'eo ket posubl ken anavezout an holl re a gomz kerneveg! Da lavarout eo ez eo deut ar chapelig da vezañ un iliz-veur da nebeutañ.

Labour a-bouez a zo bet graet hag a vez graet c'hoazh gant Kesva an Tavas Kernewek. Geriadurioù Morton NANCE a zo bet embannet gant an aozadur-se. Adembann skridoù ar grennamzer ez eus bet graet ganto ivez.

Pazenn gentañ an dasorc'hidigezh ne oa ken. Ha setu ma ya pelloc'h an traoù. Ret e oa dastum, ha dastum ez eus bet graet. Ret e oa reizhañ, ha reizhet ez eus bet graet. En e sav emañ ar c'herneveg bremañ, met an diaesañ a chom d'ober: kerzhout.

Nepell 'zo ez eus bet krouet ur gevredigezh nevez: COWETHAS AN TAVAS KERNEWK (Kevredigezh ar yezh kernevek). He fal:rein lañs d'ar c'herneveg er vuhez foran, rein tro d'ar Gerneviz yaouank da gomz o yezh. Hag e ra berzh ar gevredigezh-se.

Un dra all nevesoc'h c'hoazh: DALLETH (Derou) ur gevredigezh nevez-flamm-flimin he faliou heñvel a-walc'h ouzh re A.B.E. G. (Ar Brezhoneg Er Gêr).

1) Rastellat arc'hant evit ma vezo embannet levrioù bugale kernevek. N'eus seurt ebet evit ar mare.

2) Studiañ donnoc'h kudenn an divyezhegezh, en ur zaremprediñ ar broioù keltiek all peurgetket.

3) Skoazellañ an holl vugale da zeskiñ kerneveg ha lakaat ar re a oar dija den emwelout, da c'hoari a-gevret... e Kerneveg.

Ha nevesoc'h c'hoazh! P'emaon o skrivañ ar pennad-mañ en em gav ganin niverenn ziweshañ "AN GANNAS", kelc'hgelaouenn

Cowethas an Tavas Kernewek. Ha petra 'lennan war ar bajenn gentañ? "Dres an tamar, Newodhow da a glewyn rak an vledhen noweth drefen bos kevres kernewek y'n bellwocok ow talleth mys Whevver". Gwelet e vezo hiviziken un abadenn "Dres an Tamar" diouzh ar Sul, da l eur, ha tu 'vezo klevout kerneveg e-kerz an abadenn-se! Aesoc'h mont e darempred gant ar B.B.C. eget gant FR3.

Piv a lavaro c'hoazh ez eo ur yezh varv ar c'herneveg? Unanig bennak n'en dije ket lennet AN AMZER, moarvat.

Maodez KOMBAOD.

UN NEBEUD CHOMLEC 'HIOU TALV-
OUDUS:

COWETHAS AN TAVAS KERNEWK:

Bryan WEBB
29 Midway Drive
Uplands Park
Truru Kernow/Kerneve-Veur

•Mar falvez deoc'h bezañ kelaouet ingal, lennit:
AN GANNASpe EYTHEN (an hevelep chomlec'h d'an div:

Trewyn
Lodge Hill
Lyskerys/Liskeard
Kernow/Kerneve-Veur

•Mar faot deoc'h deskiñ kerneveg gant plijadur, ul levr:

"CORNISH IN FUNE"
Y Lolfa
Talybont
Dyfed Cymru/Kembre

DALLETH:

Anne Sandercock
Trenyn
Lodge Hill
Lyskerys/Liskeard
Kernow/Kerneve-Veur

BERTOLD BRECHT E BREZHONEG

Troet e vo oberennoù Bertold Brecht e brezhoneg, gant studierien ha brezhonegerien o chom e Bro-Bariz. Da gentañ e vo troet ar pezh-c'hoari: "L'Opéra de Quat' sous", ha dija e vez emvodoù bep divsizhun evit kregiñ gant al labour.